

Chanson ar Vesventi

1^{er} COUPLET

Kanomp breman eur ganaouen
 Divar ben an holl vesverien
 Evit lavaret da bep hini
 Ar veriones men gredi
 Koulskoude me jonj ar vad
 Diganto vign ket gueleit mad
 Ma lavaret tud fur diouto
 Holl glefet ober evel dezo.

2^e COUPLET

Koz ha yaouank, paour ha penvidic
 Tout e man heur memes tra dre nerz a bannic
 Re ha zo kalles guelorc'h evita
 He no c'hrichen n'in man nitra
 Ma zo eur noarc'h hene dieguez
 Neuz ket he bar hene barrès
 He guezek he loenet emezan
 Renez heo re huella eur vro man.

3^e COUPLET

Pa vez ho heba l'eau de vie
 Neuz ket ker hall ebet par dehini
 Temzet mad he ve ke zouarou
 Ne ket han hen a vez he brajou
 Epad he ma ho fogueal
 He dud eur guer ha ra troiou fall
 Hanter amzer labouront ket
 Kentoc'h ha yao da glask he voed.

4^e COUPLET

Eur c'hroeg zo troet da eva
 En hi zi a vank pep tra
 Elerc'h prena pep ha halen
 Va guaign ha lipa eur veren
 Arc'hant lez hag aman
 Ha hia gati da brena guin ardant
 C'hoaz pa vez gati goulennet
 Chann, eur zouben n'eo ket salet.

5^e COUPLET

Hirio meuz dizonjet an hallen
 Mez va hoas me yalou dan offeren
 Raet dimen eur c'hanliour pe zaou
 Kar effa he meus kals traou
 Hi dever ha neuz ket kuzet
 Hag arc'hant neuz ket roet
 Laouen ha ia d'an offern vintin
 Ebars an hen he ra moushoazin.

6^e COUPLET

He bugale a zo han noaz
 Ho lamet han dro dar vates-vraz
 Unan-bian zo eur c'hrauel
 Digan ar zehet prest da vervel
 Poen heo d'orc'hr monet dan offern bred
 Prenit mates ar pez zo red
 Ha digasset va groeg dar guer
 Abalamour de ma bugale ker.

7^e COUPLET

Eur mevel emezan ha lavar
 Eur barres man neuz ket ma far
 Da labourad digan bepsort mecanikou
 Ha memez han dro deur moteuriou
 Ho tonned dar guer deus foariou pe deus ar bai-
 Deus var he vicyclet dapou lamou [liou
 He zillad roguet ne ven nemet pri
 Ha c'hroas ven clevet ho fogassi.

8^e COUPLET

Eur loened paour da zul ha da lun
 Demeus an noz alies renk ober hiun
 Pa vez meo eur vevelen
 An nezer chomet eur voulien
 Merc'het yaouank guemerit ket
 Evit pried mesvier ebet
 Evit kaouet arc'han hag haour
 Evruzorc'h everc'h kichen ar paour.

9^e COUPLET

Digan mevel fur men neuz nitra
 Neur labourad c'hui po bara
 Elearc'h kichen eur mesvier
 Risk koll ar vuez he vizer
 Potred yaouank koz ves guelet
 Deuet var an oad ho klaz ho boet
 Pa he deus re gared eur veren
 Han tu all dar pez a dleen.

10^e COUPLET

Da goazed e laron kenavo
 Breman mitisien ema ho tro
 Ne gredon ket he guaforc'h diez
 Ho klevet troiour ha vesveriez
 En no touez ha zo meur a hini
 Ha guar c'hrafet hag eau de vie
 Hag vecho evont ive
 Siouas dezo eur bannik re.

11^e COUPLET

Goulskoude meus guellet an dra
 Epad ma ven klask fortuna
 Dirac heur goaz et reon gistou
 Ni na guaron ket banniou
 Ha pedal ma gredfen lavaret
 Goazet brazorc'h c'hroas diskennet
 Ni merc'het ha neuz sched bras
 Ha da lavaret he ma menergas.

12^e COUPLET

Digan den ebet ne heureuzio
 Nemet digan potred henvel diouto
 Ha guellet e vez bisachou
 Bronduet digan ners han toliou
 Perac e ve trous ken alies
 He ti eur mesvier ha vesverez ?
 Abalamour he ven ho kas gouzout
 Piou ha evo muia lagout.